

KIS-408. – Gl. **norme** ha deveradoù.

(GE – 21 10 91)

Kemeradurioù niverus zo d'an termenou-se e galleg. Orin ar Gl. **norme** eo al La. *norma*, a oa boulc'het endeo gantañ an astenn ster : oc'h aroueziñ da gentañ ar SKOUER (benveg tresañ), e teuas da dalvout kement ha "reolenn, lezenn, patrom, skouer (pezh a lakaer da batrom)". E Gl., hervez an dachenn pe an diskiblezh, o deus **norme** hag e zeveradoù gwisket sterioù hag arsterioù niverus.

I. – JEDONIEZH.

Evitañ da vezañ deuet en arver diwezhat a-walc'h, e 1753, emañ ar ster jedoniel nes da ster kentañ an diagentad latin, pa dalvez "serzh" ; sk. : "Une droite **normale** à un plan." E Br., e reer gant **serzh** ; hogen, pa c'hougevreded keal ar serzhded, talvoudek evit an eeunenoù, ouzh ar c'heal kevelep en amgant ar c'hrommennoù hag ar gorreennoù, e ranker degas un termen all, evel ma read e Gl.

Gant SADED e voe arveret an termen **reol** (sl. Fiz 15, pp. 3, 6 ; Da-64, p. 104). Ur reolenn a yezhouriezh a endalc'h da virout un termen arveret, nemet e ve un abeg sonn d'e zilezel ; daou abeg zo amañ da erlec'hiañ **skoueriek** ouzh **reol** : dave a ra **skoueriek** d'ar benveg tresañ kornioù serzh end-eeun ; diwarnañ e c'haller tennañ deveradoù diforc'hell, nad eo ket an dro gant **reol** ; sk. :

Br. "Krommennoù **skoueriek**", Gl. "Courbes **normales**" : krommennoù kenserzh o spinenoù en ur c'henboent.

Br. "Plaenenn **skoueriek** en ur poent eus ur c'horreenn", Gl. "Plan **normal** en un point d'une surface" : unan diforz eus ar plaenenoù a zo enni an eeunenn skoueriek (ar skoueriegenn) er poent-se.

Br. "**Skoueriegenn**" b., Gl. "**Normale**" : eeunenn skoueriek.

Br. "**Skoueriegenn** war ur grommenn en ur poent", Gl. "**Normale** à une courbe en un point" : nep serzhenn war ar spinenn er poent-se.

Br. "**Skoueriegenn** war ur c'horreenn en ur poent", Gl. "**Normale** à une surface en un point" : serzhenn war ar blaenenn a-spin er poent-se.

Br. “**A-skouer**”, Gl. “**Normalement**” : a-serzh.

Notomp, diwar vont, e chom digor, evit kealioù all en domani-mañ, hent an deverañ diwar **diaskouer**-.

II. – KIMIEZH HA FIZIK.

Diwezhatoc'h c'hoazh ez eo deuet ar Gl. **normal** e tachenn ar Gimiezh hag ar Fizik : ne sav ket ar reveziadennoù kentañ abretoc'h eget 1900. Da skritell eeun eo bet kemeret evit ur c'heal kementadel hep ere gant ur c'heal doareadel spis. Aotreet oa enta ar yezhouriezh vrezhonek da gantabegañ he dibab kentoc'h dre zamantoù furmel (eueuded, kened, aested a'n deverañ, hegloted gant ar c'hevatalioù arallyez) kentoc'h eget dre zamantoù sterel. Setu perak, en dro-mañ, n'eus harz ebet da zerc'hel an termen **reol** bet arveret gant SADED (sl. Fiz 18, pp. 4 hh. ; Da-64, p. 104). Meur a generadur a renabler hervez an diskiblezh pe ar rann diskiblezh :

II.1. – Bevgimiezh.

Br. “Bevgediad **reol**”, Gl. “Composé organique **normal**” : kediad a zo e volemenn e stumm un digorvell (Gl. "chaîne") anskoultronn (Gl. "non ramifié").

II.2. – Fizik.

Br. “Bevargant **reol**”, Gl. “Mercure **normal**” : bevargant er gwrezverk 0°C, en ul lec'h a uhelder 0 hag a ledred 45°.

II.3. – Meingimiezh.

Br. “Dileizhenn **reol**”, Gl. “Solution **normale**” : dileizhenn a zo he zitl un tolz-amsav (Gl. "valence-gramme", sl. SADED, Kim 4 & Kim 8) dre litr.

Br. “Dileizhenn **dekvedreol**”, Gl. “Solution **décinormale**” : dileizhenn a zo he zitl par da un dekvedenn eus titl an dileizhenn reol.

Br. “**Petvedreoded** un dileizhenn”, Gl. “**Normalité** d'une solution” : titl un dileizhenn dewerzhed dre e genfeur gant titl an dileizhenn reol ; gerienn genster : “**Feur reoded** un dileizhenn”.

II.4. – Fizik.

Br. “Gwrezverk **reol**”, Gl. “Température **normale**” : ar gwrezverk hervez skeul ar gwrezverker hidrogen ec'honad arstalek (Gl. "à volume constant"), gwask an hidrogen o vezañ 1 m bevargant reol e 0°C.

III. – LAVAR BOUTIN.

Laosk e vez arver an termen **normal** er galleg pemdeziek, e yezh ar C'hazetennerzh hag el Lennegezh. Deuet eo da dalvout kement ha "nad eo ket nemedennek". Meur a gevatal Br. (evel a gevatal Gl.) zo dezhañ :

Br. **ordinal**, Gl. **ordinaire** ; sk. : Br. "Un devezh **ordinal**", Gl. "Une journée **normale**".

Br. **boas**, Gl. **habituel** ; sk. : Br. "Troiad **voas** ar faktour", Gl. "La tournée **normale** du préposé".

Br. **reizh**, Gl. **normal, bien** (en nac'hañ, e troiennoù idiomatek) ; sk. : Br. "Ne glevan ket **reizh**", Gl. "Je n'entends pas **normalement/bien**" ; Br. "Hennezh n'eo ket **reizh**", Gl. "Ce garçon n'est pas **normal/bien**".

Dav eo arselliañ e vesk ar galleg boutin ar c'healioù "moyen" ha "normal". Daoust ma vez boaziet ar c'herienn *Français moyen* gant ur c'hemeradur neptu, e talc'h kalz speredoù d'he intent, evel e sketch Coluche, gant ar ster *Français normal*.

IV. – MEZEKNIEZH.

Er Vezekniezh, e tiforc'her fraezh Gl. **la normale** ha **la moyenne**. Ar c'heal kentañ a saveler dre gevenebañ yec'hed ha kleñved, an eil dre sevel stadegoù en ur boblañs lavaret.

Da gevatal da Gl. **moyen, la moyenne** e roer ar Br. : **keitat, ar c'heidad** (sl. Da-63, p. 18) ; astennet eo bet ster an termennoù-se er-maez eus ar par kementadel ha, diwar skouer ar Gl., e komzer eus "Gall **keitat**", h.a.

Ken abred ha derou ar bloavezhioù c'hwegont e raed gant Br. **reol** aa. evel kevatal d'ar Gl. **normal** er Vezekniezh (sl. Da-64, p. 104)¹. E lavar ar Vezekniezh bepred, a-geñver gant an adanv **normal** emañ ar pennanvioù **norme, normale, normalité** gant pep a zurchadur ster pe arver disheñvel ; e Br. e kaver da gevatal : **reol b., reolded b.**

Ned eo ket diezhomm sevel renabl an termennoù brezhonek nes dre o steriegezh en dachenn-mañ :

Br. **reol**, Gl. **normal** ; sk. : "Etre 36,5°C ha 37,5°C e vez gwrezverk **reol** an den."

Br. **keitat**, Gl. **moyen** ; sk. : "13°C eo gwrezverk **keitat** va c'hav gwin."

Br. **skouer**, Gl. **modèle, idéal** ; sk. : "Ur pried **skouer**".

¹ E niverenn gentañ *Preder*, "Keal an emrenerezh psikologek", Goañv 1958, e raen gant Br. **reolel**, a gaver ivez war Da-64, p. 104, na diñvas ket.

Br. **skouerel**, Gl. **idéál** "kemeret da bimpatrom arlakadel"; sk.: "Dre studi perzhioù an aezhennoù e teuer da dermenañ keal an aezhenn **skouerel**, houmañ o vezañ dik diouzh saveleñ Avogadro" (Da-64, p. 106). An aezhenn arlakadel zo un derc'henn a gemerer da skouer an aezhennoù; mar kavfed ur forc'had etre an aezhennoù gwerc'hel hag an aezhenn skouerel e rankfed azgwelout an arlakadenn.

Br. **derc'hek**, Gl. **idéál** "gortozet diwar jediñ"; sk.: "Zoken pa vez boull an aergelc'h, ne vez ket an teleskopoù en o barr skarat **derc'hek**" (La-08, p. 273). Forc'had a vez etre digonadur (Gl. "performances") gwerc'hek an teleskopoù hag an digonadur rakjedet, kement-se dre berzh ma wered parennoù (Gl. "facteurs") na voent ket engwerc'het (Gl. "pris en compte") er jedadurioù – alese an adanv "derc'hek" lakaet war an digonadur rakjedet.

Br. **eorizhek**, Gl. **idéál** "dec'hmeget evel dreist"; sk.: "Ar geoded **eorizhek**."

Forc'hellegezh troiennoù gallek 'zo a zeu war wel pa glasker o lakaat e brezhoneg; sk.: Gl. "Des conditions **idéales**" a c'haller intent evel Br. "Aozioù **derc'hek**", eleze "kempleg d'ar jedadurioù, e gwere an derc'hañ-gwerc'hañ", pe evel Br. "Aozioù **eorizhek**", eleze "ar gwellañ holl, e gwere an handerc'hañ".

Br. **bonan** (sl. KIS-325, La-08, p. 289), Gl. **normal, sain, physiologique**; sk.: "Trouzioù **bonan** pe gleñvedel", Gl. "Des bruits **normaux** ou pathologiques"; Br. "Kenvell heloc'h ent **vonan**", Gl. "Articulation **normalement** mobile"; Br. "E-keñver ar **bonan**", Gl. "Par rapport à la **normale**".

Evit an ampoent, ne c'haller nemet gouglevout durc'hadurioù ster o lakaat kemm etre arver **reol** ha **bonan**. Er bommoù-mañ e hañval bezañ gwell ober gant **reol(-)**: "Dindan ar werzh **reol**", Gl. "En dessous de la (valeur) **normale**"; Br. "O pellaat diouzh ar **reolded**", Gl. "Qui s'écarte de la **normale**, de l'état **normal**".

Br. **(-)he-**. Studiet eo bet c'hoazh "steudad [...] an termennoù oc'h arouezañ bezañs, ezvezañs, reñver pe feur reol un danvez en ur metou eus ar bevedeg" (KIS-375, p.); sk.: "*angost* "analgésie", *uswask* "hypertension", *iswask* "hypotension", **hewask**, "**normotension**".

Menegomp ivez luniadoù evel Br. **reolvred**, Gl. mentalement **normal** (sl. Da-64, p. 104).

Kontrol Br. **reol** zo **anreol** (Gl. **anormal**); sk.: "Kavenn **anreol**", Gl. "Cavité **anormale**"; Br. "Aozioù **anreol**", Gl. "Conditions **anormales**" Diskoulmoù all: Br. "**Kammforzh** ar broud", Gl. "Cheminement **anormal** de l'excitation" (sl.GBLF, ¶ 1429).

Evitañ da vezañ a orin disheñvel, e tenn ar Gl. **anomalie** (< hGr. *ajnwmaliva* < *ajn-wvmalo*~ "digompez") da zaremouezh gant Gl. **anormal** (< iLa. *anormalis* < La.

norma) da heul an nested sonel hag an ezvezañs a adanv diwar hennzh, a bennav diwar hemañ. Kevatal Gl. **anomalie** eo Br. **gwariadenn**, **distresad**, **direizh** hag, en degouezhioù ma c'hoari levezon **anormal**, Br. **ezreolder**.

V. – KALVEZEREZH.

En domani-mañ ez eo bet korvoet an div stirann Br. **reol-** ha **skouer-**. Kavout a reer :

Br. **skoueriek**, Gl. **normalisé** “dezhañ doare ur skouer ; reizh diouzh ur skouer kemeret da batrom, diouzh ur reizhiad furmoù divizet” (Da-64, p. 106).

Br. **reolad** b., Gl. **norme** “hollad an doareoù skoueriekaet (termenet spis ha kemeret da skouer) a zle bezañ re un ober pe disoc'h an ober-se” (*Emsav* 14, p. 65).

Kreizet eo Br. **skoueriek** war geal an unvanaat diwar ur skouer, Br. **reolad** war geal reolennoù da zedelvout. Ken e c'haller kinnig dirak an termenoù gallek kevatalioù brezhonek deveret diouzh an eil ha/pe egile eus an daou dermen :

Gl. **norme** "hollad ar reolennoù oc'h erverkañ doareoù un aozad, araezadoù kalvezel e oberierezh hag e genderc'h", Br. **reolad**.

Gl. **normal**, **standard** "reizh diouzh ar reolad, diouzh ar patrom o klotañ ouzh ar reolad ha kemeret da skouer evit ar c'henderc'h", Br. **reolat**, **skoueriek**.

Gl. **normalisé** "(graet) reizh diouzh ar reolad", Br. **skoueriek**, **skoueriekaet** (diouzh ret, e c'hallfed soñjal ivez e Br. **reolat**, **reolataet**).

Gl. **normaliser** 1. "Savelañ ur reolad", Br. **reoladiñ**. 2. "Dedelvout ur reolad d'ur c'henderc'hañ pe da genderc'hadoù", Br. **skoueriekaat** (diouzh ret, Br. **reolataat**, termen bet arveret er Gevredadouriezh, sl. *Emsav* 111, p. 104).

Gl. **normalisation**, Br. **skoueriekaat**, **skoueriekaerezh**, **reolataat**, **reolataerezh** ; **reoladerezh**, h.a. hervez ar c'hemeradur.

VI. – DISKIBLEZHIOU AR YEZH.

E diskiblezhioù ar yezh, e kaver gant ar Gl. **norme** ar forc'hellegezh bet lakaet a-wel en arver boutin ar Gl. **normal** :

Gl. **norme** “stad voas, hervez keitad hollek an degouezhioù, ha sellet peurliesañ evel reolenn : *La norme grammaticale*” (*Lexis*).

Hevelep despizadenn a amplex enta daou lankad : a) stadañ a reer e c'hoarvez *reoliek* un devoud er yezh ; b) tennañ a reer eus ar boaziañ *reoliek* ur *reolenn* d'ar boaziañ, ober eus un devoud *reoliek* un devoud *skoueriek* ; sk. : goude stadañ e tro peurliesañ krBr. *kn-*, *tn-* e Br. *kr-*, *tr-*, ober eus seurt dedro *reoliek* ur *reolenn* evit an

dezneuziañ (gant nemedenoù trestummadel, evel dedro krBr. *knech*, *tnou* e Br. *nec'h*, *naou* e-kichen *krec'h*, *traoñ*) ; da heul, dedalvout ar reolenn o tezneuziañ, da skouer, hBr. *-cnau-* (Kb. *cnoi*) e Br. *kreu-*, o tremen e se eus ar stadañ d'ar sturiañ, eus embreg ar yezhoniezh da embreg ar yezhouriezh.

Evel evit ar c'henderc'h greantel, e c'hallfed ober amañ ivez gant :

Br. **reolad** "hollad ar reolennoù a vez reizhet diouto doareoù ar yezh".

Anat e chom forc'hellek an droienn : “a vez reizhet”, rak ar **reolad** zo koulz ar **reoliegezhioù** dizoloet dre an imbourc'h war ar yezh deuet hag ar **reolennoù** savelet dre an damant d'ar yezh da zont.

Ken e kinnigfen a-walc'h stignañ daou vlein d'ar sterva ma emañ **reolad** :

– ur blein a'r stadañ, a-geñver gant ur sell *deskriadel* ouzh *patromoù* ar yezh (*patrom* a arveran amañ gant ar ster en deus er gevredadouriezh : “*patromoù* kevredadel, stuzegezhel, kalvezel”, sl. *Emsav* 64, pp. 122-123) ; **patrom yezhel (stadet)** e ve nep furm o tistreiñ **reoliek** er yezherezh, a c'hallfed envel ur **reoliegenn** (ls. **reoliegennoù**, **reoliegoù**) ;

– ur blein a'r sturiañ ; a-gevenep d'ar *patromoù* *stadet*, d'ar *reoliegoù*, emañ ar **patromoù sturiañ**, furmoù skoueriek, rumm *patromoù yezhel* gourlakaet gant ar yezhourion ; o envel a rafed **skoueriegenn** (ls. **skoueriegennoù**, **skoueriegoù**)¹. Diouzh ret, e c'hallfed lakaat war studi an *deskriadoù* an anvad hollek **reoliegouriezh**, war studi an *erskrivadoù* an anvad **skoueriegouriezh**.

Notomp e sell ar gevenebiezh ouzh istor ar *patromoù yezhel* ha n'eo ket ouzh o natur. Ur *skoueriegenn* a ra berzh a ya d'ur *reoliegenn*. Emañ orin ar *reoliegoù* gwech en emell “gouizieki” ar yezhourion, gwech e dibab emdarzh ar yezherion ; nemet e vez dazont ur *skoueriegenn*, n'eo ket e dalc'h “gouiziegezh” he saveler, hogen e disentez ar yezherion. Erfin, peurliesañ ne vez ur *skoueriegenn* nemet ur *reoliegenn* he deus roet lamm d'he c'hevezerezed : dibab *hiziv* da furm *skoueriek* oa kement ha forbannañ ar

¹ Evezhiomp e voe boulc'het ur c'hard kantved 'zo hevelep daouvleinekaat e domani diskiblezhioù ar yezh. Endra rae (endra zalc'h d'ober !) aozerion hanterenn gentañ ar c'hantved gant *yezhadur* koulz evit trevnad ar *patromoù* *stadet* ha trevnad ar *patromoù* *sturiañ* (evit ar re a arvere *gramadeg*, en en roent d'un heñvelster da *yezhadur* hep ket keloù a ziskiblezhioù *deskriadel* nag *erskrivadel*), e tegasas Goulven PENNAOD (La-01, pp. 7 hh.) ur c'hemm etre “ar *yezhoniezh* gouezoniezh ar yezhoù” (p. 8) ha kalvezerezh “ar *gramadegour* pe ar *sturyezhour*, oc'h eveshaat ouzh arver «dereat» ar yezh studiet, pe o levian he emdreiñ”. *Hiziv*, da heul, e kevenebomp *yezhadur*, *yezhoniezh*, diskiblezhioù *stadañ*, a-getep, da *gramadeg*, *yezhouriezh*, diskiblezhioù *sturiañ* (war ur poent hepken n'hon eus ket heuliet GP, pa rae-eñ eus ar *yezhouriezh* “studi ar skridoù hag ar yezh testeniekaet ganto”, p. 8, ha pa reomp-ni eus ar ger ur c'hurzhadur diwar *sturyezhouriezh*).

furmoù reoliek *hirio, hirie, hiniù*, h.a. ; skoueriekaat *ozec'h, ozac'h, ohah* diwar-bouez ar reizhskrivad *ozhac'h* a ziskouez penaos ar skoueriegenn diwezhañ a ro o stal da reoliegennoù a voe koulskoude skoueriegennoù en o amzer. War un dro, ur wech skoueriekaet ur furm, ez a d'ur reoliegenn diouzh sell ur remziad nevez a yezhoniourion...

Diwar se, e kinnigfen ar c'hevatalioù brezhonek-mañ evit an termenoù arveret e galleg e diskiblezhioù ar yezh :

Gl. **norme**, Br. **reolad** b. ; **reoliegezh** (reolad deskrivadel, patromoù stadet) ~ **skoueriegezh** (reolad erskrivadel, patromoù sturiañ).

Gl. **normal**, Br. **reolat** aa. ; **reoliek** (reolat ent deskrivadel, diwar stadañ) ~ **skoueriek** (reolat ent erskrivadel, diwar sturiañ).

Gl. **forme normale**, Br. **furm reolat** ; **furm reoliek** (ent deskrivadel), **reoliegenn** ~ **furm skoueriek** (ent erskrivadel), **skoueriegenn**.

Gl. **normaliser**, Br. **skoueriekaat**.

Gl. **forme normalisée**, Br. **furm skoueriek, furm skoueriekaet, skoueriegenn**.

Gl. **normatif** ~ **descriptif**, Br. **skoueriegel, erskrivadel** ~ **reoliegel, deskrivadel** ; ~ **sturiañ** ~ **stadet**.

Gl. **modèle descriptif, patrom stadet** (sk. : “pennanv *X* + lostger *-ek* Ø adanv *Xek*).

Gl. **modèle normatif**, Br. **patrom sturiañ** (pa savelas F. VALLEE e reolenn : “*Xek* doare enlenat ~ *Xel* doare daveat”, sl. KIS-093, La-05, pp. 68 hh., e c'houlanke ur sturiad, ur skoueriegenn, ouzh ar yezh ; ur wech graet avat ar skoueriekaat ha gougevanet ar patrom sturiañ ouzh ar yezh, ne c'hell ar yezherion nemet stadañ e vezañs, ober ur reoliegenn eus reolenn VALLEE).

Gl. **discipline descriptive**, Br. **diskiblezh deskripañ, deskrivadouriezh, reoliegouriezh** (ha **deskrivadour, reoliegour** an embregour anezhi).

Gl. **discipline normative**, Br. **diskiblezh erskrivañ, erskrivadouriezh, skoueriekaerezh**¹, (hag **eskrivadour, skoueriekaer** evit an embregour). Arveret e vez ivez **stur-** da rakger evit arouezañ an erskrivañ ; sk. : **sturyezhouriezh**, krennet e

¹ Ha, mar karfed korvoiñ donoc'h loazioù ar brezhoneg, lakaat kemm etre **skoueriekaerezh** "obererezh sturiañ" ha **skoueriegouriezh** (termen meneget uheloc'h endeo) "studi ar sturiañ hag ar sturiadoù".

yezhouriezh diwar ma spir al lostger **-ouriezh** da gevenebiñ an diskiblezh erskrivadel ez eo ouzh he c'heñvereg deskrivadel, ar **yezhoniezh**².

VII. – DESKADUREZH.

Abaoe 1793 e Frañs emañ an anvad kefridiel *Écoles Normales* war ar skolioù mistri ma stummer ar skolaerion. *Écoles normales supérieures* a reer eus an ensavadurioù ma stummer kelennerion 'zo. Kinnig a ran heuliañ reolenn ar mont dre hent an amprest d'an termenoù aralloyezh oc'h arouezañ ergorennoù lec'hel ha/pe istorel hag, en degouezh-mañ, degemer :

Gl. **École normale**, Br. **Skol normal**.

Gl. **École normale supérieure**, Br. **Skol normal uhelañ**.

Gl. **normalien**, Br. **normaliat** aa. ; **normaliad** g.-liz, **-lidi**, **normaliadez** b.-ed.

² Ouzhpenn un abeg furmel ez eus bet da zilez ar rakger **stur-** ; e zispleget 'm eus c'hoazh : “Boas omp da gomz a *sturyezhañ*, *sturyezhouriezh*, hervez ar meizadur hor boa da gentañ eus an arz-se : «(embregouriezh) sturiañ emdroadur ar yezh». E gwir, ar *sturyezhour* ne *stur* ket muioc'h eskoridigezh ar furmoù yezh nevez eget ma *stur* ar barzh diwanidigezh e varzhonegoù. Setu perak e ve kenkoulz ober gant *yezhouriezh* hep mui [...]” (La-08, p. 518).